

kazetenn an stourmoù e breizh

10 Iun

# breizh



genver 1983 niv.16



Luc'hskudennoù. Ouest-France

# LIZHIRI DA "VREMAÑ"

Emañ "Bremañ" o tont da vezañ miziek. Well a se ! Koumanantet on da veur a gelaouenn diwar-benn Breizh, lod e galleg, lod all e brezhoneg, pe c'hoazh divyezhek, ha dav dir laret ez eo "Bremañ" unan deus ar re wellañ, hag e vo moarvat ar "Bremañ" miziek ar gelaouenn viziek gwellañ ha dedennusañ e Breizh, a-raok ar re c'hallek.

Dav dir laret deoc'h memestra on bet spontet gant ur pennad lakaet e niverenn 6-7 ar gelaouenn. "Ar vosenn zu" oa ar talbenn deus-oustañ. Ne gomprenan ket penaos e c'hell ur gelaouenn evel "Bremañ" embann ur pennad ken dic'houzav ha leun a c'hevies hag hennezh. Spi 'm eus ne vo ket mui a skridoù evel-se e-barzh "Bremañ".

Kavout a ra dir e teu brav ar brezhoneg gant ar re a skriv e-barzh "Bremañ"; ober a reont gant ur yezh

vev, na re lennegel, na re "boblek" (ar re a ra gant ur brezhoneg "poblek" a lak poizioù gallek ba' o yezh, betek re, 'pezh ne rit ket, memestra.)

Dalc'hit mat evit ar Vro hag ar Yezh !

Guenael Emelionoff  
Le Louroux-Béconnais (49)

Adhoumanantiñ a ran da Vremañ peogwir e anavezan mat ar c'hudennoù arc'hant a zo gant ar c'helaouennoù brezhonek. Anabat deoc'h kredit avat ez on a-du gant kement tra a vez skrivet ganeoc'h : stourm evit hon sevenadur a zo un dra vat, met ho stourm evit ur Vreizh sokialour n'eo ket ma hini. Domaj eo, rak tud yaouank evelon da bella diouzh SAE abalamour da-se.

Tepot Guilhmod  
Naoned

Un gazetenn dudius eo Bremañ. Reñ a ra dir da c'houzout keloù a bep seurt diwar-benn Breizh hag he stourm evit saveteiñ hor yezh. Talvoudus-tre eo ho gazetenn evidon-me rak emañ o studiañ brezhoneg. Heuliet 'm eus rumadoù-kentelioù dre lizher (gant Skol Ober, ar Falz).

Plijout a rafe dir gallout komz brezhoneg gant tud ar vro met siwazh n'eo ket aes da gavout brezhonegerien e Mersilha.

Ouzhpenn-se e talc'han ar spi da c'hallout ur reiz pe reiz bevañ ha labourat e Breizh.

A drugarez da gazetennou evel "Bremañ" ez eus tu da virout ul liamm gant ar vro. Un dra vat eo ma teu "Bremañ" da vezañ miziek. Kendalc'hit ho labour !

Yann Kerforne  
Mersilha (13)

## Brezhoneg er prizonioù.

Gouzout a reer dija e ra unan eus izili hor C'hevredigezh skol brezhoneg e prizon ar plac'hed e Roazhon. Ha setu eo bet degouezhet o doa c'hoant peder anezho da studiañ a-gevret. Ma kredit pe ne gredit ket, un dra a seblant her eun, a zo bet nac'het gant ar renevez, ur plac'h neut kenañ. Ret eo, emezi, kemer anezho hini hag hini, perak ? N'ouzer ket. Marteze abalamour ar brezhoneg ne blij ket nemeur d'ar renevez-se. Un C'hallez a oa o chom en Aljeria eo, ha lakaat ar ra moarvat ar Vaetoned hag ar "bikoad", ar aljerianed, war an hevelep pazenn !

## Servijoù brezhonek protestant war delezioù R.B.J.

A-benn ar fin ! Setu troidigezh ul lizher (siwazh e galleg !) renevet digant rener Radio Breizh Tzel (R.B.J.).

"Aotrou her, Goude resev ho koulenn kinnig a ran skrivañ war delezioù R.B.J. ur gasadenn ur c'hand eur evit ar brotestanted da geñver gouelioù ar Nedeleg ha Pas. Ar c'hand eur-se a c'helle moarvat bezañ skinet etre 9e45 ha 10e00 ma ne vez ket kemmoù a-bouez er programmoù.

Kasit dimp, me ho ped, roll an danvezioù da vezañ skinet evit ma ouezimp en ur doare klok ar tu d'en em gemer evit ar gasadenn.

Sinet : René Abjean.  
Trugarekaat a reomp a-geiz halon ar Aotrou René Abjean evit e skoazell en afer-se.

Shingomz ha Skinwel  
St Brieg



M'en em gavan a-du gant pennad Herve ar Beg (Bremañ niv.15) diwar-benn an Talbenn Sevenadurel Araokour Breizhat pa lavar eo poent lakaat ar traoù sklaer e-barzh, pa ziskouez an dislavaroù etre politikerezh ar galloud ha promesaou ar PS, n'on ket evit mont d'e heul penn-da-benn. Re eun e zoare da varn an traoù : e ve Diwan hag an aotreezh war ar brezhoneg gouñidoù pwezusañ ar bloavezhioù diwezhañ ? A dra-sur. Met penaos int bet gounezet ?

Da gentañ, evit Diwan, n'eo ket bet "gounezet" netra c'hoazh. Ur stourm eo atav Diwan, hag un oberenn hollbouezus. Met n'eo ket anezhañ, evel-se, er-maez eus an en-dro, distag a-grenn eus ar strolladoù a stourm evit da-zont pobl Vreizh. Evit bezañ unan eus ar re o deus savet Diwan e ouzon ez eo bet da gentañ oberenn Skol An Emsav a-stroll ha buan a-walc'h hini un toul-lad mat a izili U.D.B. (1), a-raok na zeuje kalzig tud a hiniennoù da gemer o flas. E-nebiñ a ra Herve ar Beg Diwan diouzh un tu (ha n'ema ket en Talbenn) hag a zo evedus, ha

diouzh un tu all an Talbenn hag a vefe dievedus. Perak seurt enebiezh pa weler ez eo ar strolladoù o deus graet ar muiañ evit Diwan a zo ivez an oberiantañ e-diabarzh an Talbenn. Lavaromp c'hoazh ez eo bet kaset war-raok menoz Diwan e-diabarzh an Talbenn, e-lec'h m'eo bet degemeret da zisplegañ e stourm. Pelec'h emañ ar re a harp ar muiañ Diwan ma n'eo ket en Talbenn. Daoust ha n'eo ket an tiez-kêr PS a skoazell ar muiañ Diwan. Piv a ya enep ar muiañ ar F.E.N., ar P.C.F. hag an tu dehou (gwelit an ao. Benard, maer Pont 'N Abad) a zigreske atav yalc'had Diwan evit ar "Charte".

Hag an aotreegezh war ar brezhoneg ? O lenn skrid Herve ar Beg vefe kredet eo bet gounezet hepken gant un nebeut studierien er skol-veur ha Per Denez. 'Vefent bet e penn ar stourm-se: a dra-sur ! N'eo ket micherourien Dubigeon pe pesketourien Ar Gelveneg o dije gelllet bezañ. Ar pezh a gavan dañjerus eo e c'heller lakaat da grediñ eo deut a-benn o-unan un nebeut studierien ha Per Denez da gas ar maout d'ar gêr. Ar pezh

a dalvezfe da lavarout e vefe a-walc'h gant ur seurt stourm Koulskoude, ma vefe c'hoazh an tu dehou e penn ne vefe den gant an aotreegezh brezhoneg hiziv. An aotreegezh a oa e-touez goulennoù an Talbenn. Pouezet en deus hemañ war deputeed ar PS, war ar Penseg ha war Savary evit-se. En em c'houlenn a ran ha n'emañ ket Herve ar Beg o tagañ an Talbenn war ar roll fetisañ en deus gelllet kaout. Met piv a vo gouest da vuzuliañ war hir dermen, pouez ha levezon an darempredoù etre ar strolladoù, pa ne ve ken dre hanterouriezh dileuridi o deus a-wechoù, ul levezon bras war o strollad. N'eo ket dindan pemzektez hepken ez eo bet gounezet an Aotreegezh.

Ha perak lakaat ar bec'h war ar sindikad-mañ sindikad pa ne oar ket an ezel boutin ez eus anezhañ zoken un ezel eus an Talbenn. Met, ma labourfe muoc'h an "emsaverien" e-barzh ar sindikad-se, marteze e vefe un tammig sklaeroc'h mennozioù an izili all, ha brasoc'h o c'hoant stourm. N'eo ket kas d'ar blotoù ar strolladoù n'int ket war hon

diavezoù sevenadurel breizhek a zo d'ober. Eus da-se eo pobl Vreizh, ha n'eo ket ouzh-penn 5 % anezhi o votiñ evit ur strollad breizhat, a vo dav ivez kas da sutal.

Tangi Louarn.  
(1) Klevet 'm eus a-wechoù tud o reiñ meuleudi da z-Diwan evit e labour "dispac'hel" (révolutionnaire) hag o pignigañ hini Skol An Emsav pe U.D.B.. En em c'houlenn a ran e gwirionez penaos e c'hellont ober seurt troc'h. E-giz pa vefe tu da gemer ar vrec'h hep derc'hel kont eus ar c'horf en e bezh. Na pet gwec'h e vo ar re stourmusañ barzh Diwan a vo kavet ivez o kas an traoù war-raok barzh UDB pe Skol An Emsav. Diaes kompren neuze e vefe graet anezho tud a-zoare dindan un anv, ha tud a-onik pe nul dindan unan all. Daoust ha n'eo ket kentoc'h ez eus meur a stourm gant ur memes stourm. Roll ur strollad politikel eo kemer ar galloud, hini ur strollad sevenadurel kaout ur politikerezh sevenadurel da grouiñ ur vuhez breizhek e Breizh, hag hini ur skol eo sevel hor bugale en doare gwellañ en hor yezh evit priediñ o buhez da zont.

## bremañ



HA SKOLIOU DIWAN ?

# MIZIEK

# KOUMANANT

# BLOAZ

12 Nenn=96 lur

## AC'HANTA! AOTROU FITERMAN

**D**'an 3 a viz Here 1982 e skrive Skol An Emsav d'ar c'hamalad Ministr Charles Fiterman evit goulenn digantañ bezañ madelezhus a-walc'h da zegemer ac'hanomp evit kaozeal ha klask diskoulmañ kudenn ar panelloù divyezhek. Doare ebet abaoe ! Moarvat emañ hol lizher o louediñ en un diretenn bennak, renket aze gant ul louf torchenn divarrek ha dibreder war gudennoù Breizh.

N'eo ket bet a-walc'h deomp implijout al lizherennoù pegus ! N'eo ket a-walc'h deomp diframmañ panelloù 'zo ha kas anezho dirak Prefeti Kemper...evit tennañ evezh an aotrou Ministr. Petra e ranker ober neuze ? Arabadus e vefe skrivañ amañ roll an dud dilennet hon eus kejet ganto. Atav an hevelep diskan. Promesaoù a vil vern.

Gortoz ! Gortoz bepred ! Kredapl ne dalvez ket Skol An Emsav, (hag an holl re a skoazell anezhi) muioc'h eget ur bramm kaoc'h evit pennoù bras Paris. Gwazh a se evito ! Emzalc'h faeus Ministr an Transportoù ne lako ket ac'hanomp da cheñch. Muioc'h evit biskoazh e vo stourmet rak ar gouarnamant-mañ, e-giz ar re all ne seblant ket bezañ gwall chalet gant sevenadur Breizh. Ra zivallo memestra, o lakaat an dud da c'hortoz re, da goll pasianted, e sav imor enno, e sav droug en o revr hag eus ur c'hi doñv e vez graet ur bleiz arajet. Eus Korsikiz e vez kaozeet kalz er mare-mañ. Met gwir eo ne implijont ket an hevelep doareoù.



### LEONIZ WAR HENT KEMPER

**D**'ar Sadorn 18 a viz Kerzu e oa bet galvet an dud da vanifestiñ dirak prefeti Kemper gant Skol An Emsav. An dra-mañ evit goulenn e vefe divyezhek ar panelloù-hent e Breizh.

E Bro-Leon, eveljust, e oa bet klevet ar galv-se ! Ur strollad e oamp neuze o vont kuit eus Brest, war-dro kreisteiz, gant ar soñj tennañ ar panelloù a vefe kavet ganeomp en ur vont gant hon hent.

Ha setu un tammig pelloc'h, war-du Plou-gastell, e kavomp ur pezhad panell : peder pe bemp bihan staget an eil ouzh eben. Petra ober ? Ale, deomp dezhi ! Kaer hon doa treiñ ha distreiñ ar binviji, ne deuomp ket a-benn da zivisañ anezho. An dra nemetañ d'ober oa dizouarañ ar banell en he fezh. D'ar mare-se, e tremenas ur c'hamalad deomp, hag a oa o vont d'ar vanifestadeg ivez. Setu, a-benn ar fin edomp pemp o tougen ar banell betek ar c'harr.

Ya, met re vrav e vefe bet mod-se ! Evel m'o dije c'hweset al logod, setu ar c'hizier oc'h en em gavout ! "Petra 'reoc'h aze ?

- Tennañ 'reomp ar banell !  
- Ha petra ho peus c'hoant ober ganti ?  
Ha ni da zisplegañ an traoù.

"A ! a lavar unan deus outo, en ur sellet ouzh e euriel, ho manifesta-deg 'zo da 2 eur, hag eo dija 1 eur kazimant. Bon, neuze, gwelloc'h deoc'h dont da welet ac'hanomp warc'hoazh, disul, e Kerc'hor, mod all ne voc'h ket d'an eur e Kemper. Amzer da selaou an holl dud, 'vo ket echu a-raok 4 eur, sur !

- Mes a-raok mont kuit, eme an eil, e vo ret deoc'h lakaat ar banell en he flas en-dro !  
- Mes gouzout a reoc'h ne c'hellimp ket en em gavout hep panell e Kemper, a zisplegomp dezho. Ma 'vez lakaet houmañ en douar en-dro, e tennimp reoù all goude-se ! Bezit sur eus an dra-se !  
- O mes n'omp ket a-enep d'ho mennoziou ! Ober a reomp hon labour, ha setu tout.

Ha setu e lavaromp dezho ez afemp d'o gwelet an devezh war-lerc'h.

Evel just, e Kemper omp bet kemeret evit genaoucienn, o vezañ m'hon doa graet an traoù e-pad an deiz... Gant piv emañ

an dalc'h a gav deoc'h ?..

War-dro 3 eur neuze, d'ar Sul goude lein, emañ ar strollad Leoniz dirak ti an archerien e Kerc'hor !  
"Tac'he ar strollad en e bezh !" eme an archer. Pep hini ac'hanomp en deus diskleriet ar pezh en doa graet ha perak.

Pep abadenn he deus echuet gant ur gentel vrezhonek. Lod ac'hanomp o deus goulennet kaozeal e brezhoneg, nemet' n'an ha ne ouie ket.

Prosez pe get ? N'ouzomp dare ! Forzh penaos ne vo ket a-raok 6 miz da nebeutañ !

Memestra, omp bet souezhet ha dipitet war ar memes tro, o welet archerien ken degemerus war dachenn ar mennoziou : prest edont da dreiñ e brezhoneg : "accueilleil" ha "bureau" en o zi. Kinnig a raimp dezho panelloù "degemer" ha "burev". Gwelet 'vo betek pelec'h e c'hellint mont. Bezit prest memestra da sikour ac'hanomp a-benn c'hwec'h miz ! A-benn ar prosez !

Fulup, Mari Fransoaz, Mikael, Reun, Jil, Kristina

### Deuit ganeomp 'ta!

**K**regif a ra ur bloavezh nevez, unan ouzhpenn evit hor yezh, hor sevenadur, hag eveljust, evit ar stourm. Anat eo d'an holl emeur o tremen ur mare a-bouez-tre evit ar brezhoneg. Hiniennou a lavar e vo diskoulmet kudenn hor yezh pa vo dieub Breizh goude n'ouzer ket peseurt taol re-veulzi ! Alies, siwazh, ne vez nemet un digarez toull evit kuzhat o digasted hag o divarreezh dirak ur mell kudenn. Tu a vefe respont d'ar re-se pezh a skrive R.Hemon e 1927 "Saveteet e vo Breizh an deiz m'hor bezo desket d'hor c'henvroiz lenn ha skrivañ hor yezh, en deiz m'hor bezo displeget dezho hon istor, en deiz m'hor bezo gwellaet hor yezh, graet hol lennegezh, savet hor skolioù gant hor mistri hag hol levrioù paet gant hom ac'hant ; en deiz m'hor bezo digoret hag uhelaet a-walc'h speredoù hor c'henvroiz... hag e lavarit : kement-se ne c'hell ket bezañ hep ar frankiz politikel. Neuze n'anavezit ket istor broadelezhioù bihan Europa. Hogen bezit dinec'h : gounezet e vo ar frankiz politikel hep re a brezegennou a-raok ma vo sevenet an hanter eus kement-se".

Emañ Skol An Emsav o klask lakaat ar brezhoneg da vezañ digemet ret war vord an hentoù, e-barzh an tiez-kêr, hag er vuhez foran. 'Ur stourm hir e vo an hini a zo bet dibabet ganeomp. Ret 'vo deomp stourm a-enep d'ar stad eveljust, ha pennoù kalet 'zo e Paris ! Pe

gentoc'h tud bouzar. Met pennoù kalet 'zo e Breizh ivez, tud a stourm evit Breizh sañset, tud a sav a-du gant ar Brezhoneg sañset, tud a garfe ar Brezhoneg ! Ur bern eus ar re-se n'int ket bet gwelet e Kemper d'an 18 a viz Kerzu. Perak ? An aliesañ peogwir e kavont gwelloc'h pismigañ ha randoniñ e-barzh o chapelioùigoù, e-lec'h kemer perzh e-barzh ur stourmadeg resis. Netra nevez dindan lagad an heol.

Poent bras eo d'an dud kompren e rankomp kenlabourat ma fell deomp saveteiñ hor yezh. Poent bras eo d'an emsaverien anzav ne c'hell ket ur strollad sevenadurel bezañ dreist e pep keñver, Skol An Emsav, e-giz ar re all, hag ar mod gwellañ da lakaat an traoù da vont war-raok a vefe dont da skoazellañ ac'hanomp mod pe vod. Ar strollad n'eo nemet ar benveg a servijo deomp da gas da benn stourmadegoù 'zo.

E-giz ma vez kavet stourmerien war an dachenn bolitikel e rankomp kavout e Breizh stourmerien evit ar Brezhoneg. Boulc'het hon eus un hent dirak prefeti Kemper, kement-all a chom da ober c'hoazh evit ar skingomz, ar skinwel, an tiez-kêr... hag all, hag all.

Deuit ganeomp 'ta hag an holl a-gevret e vo tu cheñch penn d'ar vazh, ha lakaat lanv du ar galleg da gilaf.

Rann ar Stourmoù, SAE.  
Charlie Grall





### VOLEM VIURE AL PAIS

**A** navezet eo gant al lod vrasañ eus an dud anv bro OKITANIA. Petra eo e gwirionez ? Diaesoc'h e vefe kaout respontoù resis. Ema Okitania o'n em astenn war 33 departamant, e kreisteiz ar Stad C'hall : 190.000 Km<sup>2</sup> (Breizh : 35.000 Km<sup>2</sup>), 13 milion a dud, ha 5 milion anezho oc'h implij o yezh, an okitaneg. Emsav Bro-Okitania n'eo ket gwall anavezet kennebeut, daoust da dud vrudet evel ar skrivagner Robert Lafont. Marteze eo abalamour ma n'eo ket deut a-benn okitaniz da sevel strolladoù padus ha diazezet mat evel ma 'z eus e Breizh. Koulskoude, abaoe un nebeut bloavezhioù e seblant ar strollad "Movement Socialista e Autonomista Occitan, Volem Viure Al Pais", anvet aliesoc'h "V.V.A.P.", bodañ ar re a zo e penn araok ar stourm evit pobl Okitania. Kejet hon eus gant daou eus ar re a ra war-dro ar strollad-se, Michel LUMEN ha Gérard TAUTIL, ha graet goulennou outo diwar-benn o bro hag ar pezh a reont.

**Bremañ :** Michel Lumen, ezal out eus VVAP (Volem Viure Al Pais). Daoust hag ef e c'heller lavarout petra eo ar strollad en Okitania ?

**Michel Lumen :** Bremañ ez omp ar strollad okitanat sokialour nemetañ a lavar eus o komz en anv pobl Okitania hag a stourm evit he frankiz sokial ha broadel. Ganet omp bet e 1974 da heul ar stourmad a oa bet gant Robert Lafont evit lakaat anezhañ da vont da zavez-Prezidant e Bro-C'hall. Savet e oa bet, en-dro d'ar skrivagner brudet-se, komiteoù-lec'h, a zo deut da vevañ, war-lerc'h, komiteoù diazez VVAP. Goude-se ez eus komiteoù-rannvro hag ur c'huzul...broadel, mar karit... okitanat.

**B :** Ha petra eo pal ha labour pouezusañ VVAP en anzer a-vremañ ?

**M L :** Ni fell deomp ur statud emrenerezh evit Okitania en he fezh. Da lavarout eo e

soñj deomp e ranker cheñch ar rannvroù-program e-giz m'emaint bremañ. Goulenn a reomp e vefe dalc'het gant ar rannvroù da-zont eus ekonomiezh, kudennoù sokial ha yezh ar rannvroù okitanat, ha goulenn a reomp, e-giz m'hon eus skrivet e-barzh ul levrig-bruderezh "statud emrenerezh evit Okitania", e c'heller pobl Okitania bezañ anavezet e kement degouezh a zo.

**B :** Evit ar mare, pe re eo ho kudennoù resis ?

**M L :** Labourat a reomp war an dachenn evit ma teufe an dud da c'houzout int okitaniz. Gouzout a reont ez int disheñvel, met n'eus ket ganto un emskiant vroadel (conscience nationale). Klask a reomp lakaat anezhi da ziwanañ. Pal VVAP eo dieubidigezh sokial ha broadel Okitania, ha fellout a ra deomp kas an daou stourm war-raok, an eil dre egile. Pouezus-tre eo ar stourmoù sokial du-mañ. Dihun pobl Okitania a zeuio dre ar stourmadoù war an dachenn.

**B :** Ha talvezout a ra an dra-se n'eo ket pouezus ar votadegoù evidoc'h ?

**M L :** Ne ra ket, tamm ebet. Ar votadegoù ne vezont ket laosket a-gostez ganeomp. Kinniget hon eus tud. Bez hon eus un nebeut izili a zo bet er c'huzulioù-kêr, un nebeut maered zoken.

**B :** Daoust hag ef e oa war listennoù VVAP pe war listennoù boutin eus an tu kleiz ?

**M L :** Pa 'z omp bet dilennet e oa dreist-holl war listennoù boutin eus an tu kleiz.

**B :** N'eus ket bet re a gudennoù gant strolladoù a-gleiz ar c'hwec'hkorn ?

**M L :** Kudennoù a vez atav pa vez dislavarioù. Met ret eo diskouez ez eus ac'hanomp.

**B :** Daoust hag ef ho peus kinniget tud war listennoù VVAP nemetken ?

**M L :** Graet hon eus : war ur program VVAP evit an deputeed. Ha gounezet hon eus war-dro 4 pe 5 % eus ar mouezhioù ! Pezh n'eo ket kalz c'hoazh.

**B :** Penaos e labourit war an dachenn ?

**Gérard Tautil :** An divroañ

okitanat eo unan eus an temoù hon eus dibabet. Ur gudenn c'hrevus eo en hor bro. Kalz tud a gustum kemer an tren bep Sadorn ha bep Sul. An tu kleiz n'eo ket gwall chalet gant-se. Pierre Mauroy en deus lavaret e Lille dirak dileuridi a vro Okitania : "N'eo ket ret deoc'h dont amañ ! Ma fell deoc'h dibab ur vicher all, pe kuitaat ar vro-mañ evit mont da forzh petore hini all, e c'hellit hen ober diouzhtu ! Ar rektor 'zo amañ ma fell deoc'h kaout ho frankiz en-dro. N'eo ket ret deoc'h ober skol na bezañ amañ." Savet ez eus bet en Norzh, e Pariz hag un tammig e pep lec'h, kuzulioù enep an divroañ. VVAP a glasko o bodañ evit stourm asambles.

**B :** Piv eo an dud-se ? Peseur o micherioù ?



**G T :** Implijidi ar velestradurezh (administration), an SNCF, ar PTT, dreist-holl, an EDF...

**B :** Peseurt pouez he deus kudenñ ar gwinn e gwirionez ?

**M L :** Ur gudenn okitan eo, met n'eo ket ar gudenn nemeti en Okitania. N'eus anezhi nemet en ur vro vihan, al Leng adoc. Diaes eo gwerzhañ ar gwinn. Un nebeut bloavezhioù 'zo eo bet lakaet ar beizanted da denañ kuit ar gwinn dre lavarout dezho e raent gwinn fall. Plantet o deus gwinnegi nevez a ras gwinn gvelloc'h, met ne gavont ket sav d'o gwinn bepred. Er memes anzer e vez lakaet da zont war marc'had Bro-C'hall, gwinn a vro Itali, forzh pegement a-wechoù, da ziskar ar prizioù. Eveljust, n'emañ ket an diskoulm ganeomp. Tu a vefe ober traoù all estreget gwinn, da zistruj gwinnegi, met arabat e vefe d'al labourerien en em gavout hap gopr e-pad meur a vloavezh. N'eo ket difenn ar vro a fell deomp hepken, rak an holl bobloù o deus ar gwinn da vevañ.

**B :** Peseurt plas o deus ar yezh hag ar c'hudennoù sevenadurel evit tud VVAP ?

**M L :** Evidomp eo pouezus-tre kudenñ ar yezh. Rak evit ma teuo pobl Okitania da vevañ mestr en-dro war he zokadur e rank ivez adperc'hennañ he yezh, ur yezh a zo o vont da goll. Diwar 13 milion a dud ez eus 5 milion bennak a gomz pe a gompren okitaneg. War gil e ya atav an niver-se.

**B :** Daoust hag ef ez eus un dihun e-touez ar re yaouank ?

**M L :** Ya, un dihun 'zo e-touez ar re yaouank abaoe un nebeut bloavezhioù. An dra-se a weler dre niver ar re a dremen an arnodenn (examen) okitanek er vachelouriezh (baccalauréat). Ar pezh zo bet a-bouez dreist-holl eo krouidigezh ar "c'halandret", ar skolioù-mamm okitanek. E Pau eo bet savet ar

Euskadi pe e Breizh, met n'int ket niverus, rak dont a ra eus un emskiant a zo deut gant un niver bihan a dud.

**B :** Daoust hag ef e ya war-raok an emskiant e Bro Okitania ?

**M L :** Ya ! Ne ya ket buan war-raok, met kregiñ a reer da santout e soñj an dud muioc'h en ur mod "okitan". Stourm a reomp evit al labour, evit ma vo ingaloc'h an dud etrezo ha war-un-dro enep ar gopitalouriezh, enep an impalaerouriezh hag evit Europa ar bobloù.

**B :** Peseurt emzalc'h ho peus e-keñver an tu kleiz a zo bremañ e penn ar stad ?

**M L :** Promesaoù zo bet graet deomp, gant an tu kleiz a zo e penn ar stad, e vefe dalc'het kont eus personelezh rannvroù Okitania. Chom a

reomp evezhek-tre e-keñver an tu kleiz a zo bremañ e penn, met ober a raimp pep tra evit ma ne zeuio ket an tu dehou en-dro. Spi hon eus e cheñcho c'hoazh an traoù war an tu mat.

**B :** Pet bugel a zo ? Daoust hag ef ez eus skolioù kentañ derez ?

**M L :** Klasoù bihan int. N'int ket savet diwar skouer an "Deskadurezh Vroadel". Klask a reer lakaat ar vugale da vevañ o sevenadur. N'eus ket skolioù kentañ derez c'hoazh. Met, gant ma teuo bras ar vugale e vo ret soñjal er gudenn-se, ha bez e vo, sur, skolioù kentañ derez okitanek.

**B :** Daoust hag ef ez eus tud yaouank a gomz adarre okitaneg er gêr, e-giz yezh ar familh ?

**M L :** Ya, bez ez eus tud yaouank a soñj dezho e talv ar boan mirout ar yezh ha lakaat anezhi adarre en he flas. Bez ez eus tud yaouank o tessevel o bugale en okitaneg, un tammig evel e Bro

Daspugnet gant Tangi Louarn.

\*

Evit gouzout hiroc'h e c'hellit skrivañ da :  
M.S.A.O.  
Volem Viure Al Pais  
B.P. 69  
83502 LA SEYNE

Embann a ra V.V.A.P. ur gelaouenn divyezhek bep miz :  
"Occitania - Volem Viure Al Pais  
34 Bd Marcel Sembat  
11000 NARBONNE  
(50 lur ar bloaz).

Bez e c'heller ivez gourc'hemenn al levrig :  
"Statut d'Autonomie Pour l'Occitanie" (Here 1980)  
evit 15 lur, er memes chomlec'h.

# BROÏOU ESTREN

## AN T-OIREACHTAS

**G**ouel bras ar sevenadur gouezel eo an tOireachtas. Bep bloaz e vez dalc'het e dibenn miz Here, er Gouezelva, pe en e ardremez, pe e Dulenn. En abeg d'ar roll bras a c'hoari an iwerzhoneg ennañ ez eo da vezañ keñveriet gant an Eisteddfod ha gant Mod Alba. N'eo ket ken stank an Iwerzhoniz kar-o-yezh ha ma'z eo ar Gembreiz ha ne zered ket eta dekmiliadoù a dud d'ar gouel-mañ evel ma c'hoarvez e Kembre. Ne vez ket ezhomm d'an azerien feurmiñ ur babell vras ha teltennoù da lakaat en ur mell park : a-walc'h eo dibab ur griadenn e-lec'h ma'z eus ostalerioù da lojañ ar berzhidi, ha satioù bras ha niverus a-walc'h evit ar c'henstrivadegoù. Hevlene e Tra Li, Kerri, e oa 1.400 den en holl o kemer perzh er c'henstrivadegoù ha marteze o daougement a arvesterien. E-keñver niver ar remañ ez eo muioc'h da vout keñveriet gant Gouel ar Brezhoneg, met talvoud a ra spisaat ne vez koulz lavarout nemet iwerzhonegerien eus an arvesterien-se. Pep tra a vez displeget en iwerzhoneg.

Aozet e vez an tOireachtas gant ur poellgor o vodañ dileuridi eus an darn vrasañ eus an aozadurioù sevenadurel iwerzhonat, ar re a bled d'ar yezh, d'ar sonerezh henvoazel, d'ar sportoù gouezel. Koulskoude, na Gael-Linn, na Kevredigezh ar Sonerien hag ar Gaelic Athletic Association ne sammont ket kalz eus an trevell ; un darn vat eus an dileuridi zo eus Conrath na Gaeilge (Kevre ar Gouezelleg). Forzh penaos, ur skipailh arbennik a ra war-dro prientadur an Oireachtas a-hed ar bloaz. Hag evit a sell ouzh an diarbennoù pleustrek da vezañ graet war an dachenn, kefridi ur poellgor lec'hel e vez.

Petra zo 'ta da zedennañ tud d'an Oireachtas ? Kenstrivadegoù liesseurt a vez. Ar re bouezusañ a genstroll ar yezh hag ar sonerezh, da lavarout eo ar c'henstrivadegoù-kan int. Ugent seurt bennek a zo anezho : kan hiniennel, kor, "laisceadal" (kan a-stroll evit ar blijadur), kan eilet, kan hep eiladur, ha dreist-holl ar sean nos (kan giz kozh). E pep rummad ez eus isrummadoù : gwazed, merc'hed, mesket, dindan 40 vloaz, yaouankizoù. Ouzhpenn dek seurt kenstrivadegoù sonerezh-benvez vez ivez : flead-staen, flead-treuz, violoù, biniou bras, biniou-llin, telenn - a-hiniennou, daou-ha-daou, a-stroll, a-vagad, c'cilli.

Diwar-benn ar sean nos e rankan lavarout un nebeut gerioù : un doare-kanañ eo a zegas soñj eus doareoù norzhafrikat pe indiat, gant vogalennoù "modellet" war meur a notenn, o tisplegañ alies karantez pe c'hilac'har da heul ur gwallzarvoud pe dudi gant an natur. Pleustret e vez dreist-holl e Gouezelva Konnac'ht, ha ma oa da zoujañ dek vloaz 'zo e oa o steuziañ, hiziv an deiz e weler

kalzig tud yaouank e-touez ar genstriverien. Ne vez ket prizet an doare klemmvanus ha hirvoudus-se gant ar re a zo digas pe arallekaet e-keñver ar sevenadur iwerzhonat-gouezel. E Tra Li e lavare avat an Ao. Pádraig O Fiannachta, prezidant an Oireachtas hevlene, e oa ar sean nos an elfenn bouezusañ eus ar sevenadur-se. "Bez 'ez eo evel sonerezh-benvez, met amañ ar genoù eo ar benveg". Hag e tisklerie c'hoazh "D'ar sperduoù trubuilhet ez eo ur gwelloc'h louzou eget ar re a vez kemennet gant ar vezeien, ha gwelloc'h eget ar predererezh trehontel (transcendental meditation). Perak ne vez ket kaset gant gwagnenn Radio Telefís Éireann ? Tri abeg : hon tra deomp-ni eo ; ne vez ket pleustret war dreuzoù Bro-Saoz ; n'eo ket ur mod nevez evel ar predererezh trehontel". Darn eus abadennoù an Oireachtas a dalvez d'ar yezh komzet hepken : divizoù daou, danevelloù. Ar c'henstrivadegoù-sport a vez aozet gant harp ar GAA. A-drugarez d'ar genstrivadeg hurling e voe rastellet hevlene £2.500 evit kef an Oireachtas.

Kement a abadennoù a vez ma vez a-wechoù meur a hini d'an hevelep mare. Bennoz e vez un abaden vras bennek : un nozvezh laouen aozet gant tud eus ar Gouezelva, c'cilioù, sonerezh gant Kevredigezh ar Sonerien, prezegennoù. Un Devezh ar Re Yaouank zo ouzhpenn-se. E kenstrivadegoù 'zo e vez etre 25 ha 35 den o kevezata, e re all e vez etre 6 ha 12.

Prizioù ha kern-trec'h a vez roet d'ar re a ya ganto

"ar maout". Ar prizioù kentañ a c'hell bezañ etre £50 ha £100, lod zo uheloc'h koulskoude. Er c'henstrivadegoù pouezusañ e vez kinniget kiboù arc'hant (kern-trec'h) d'ar re o devez gouezet hag e vez garanet o anvioù warno - roet e vezont en-dro goude bloaz. Anvet eo ar c'herm-se hervez tud hag o deus bet graet labour a-bouez evit ar yezh, ar sonerezh, h.a.



Roet e vez skodennoù gant hiniennoù ha kompagnunzhioù, o kemmañ etre £1 ha £500, da skoazellañ ar Oireachtas : anvioù ar proferien ha kementad o roadoù a vez merket e programm an Oireachtas. Gant ar £5.500 dastumet diwar skodennoù er bloaz-mañ hag an £8.000 pe £10.000 diwar vilhedoù mont-tre ne vefed ket evit paeañ an holl vizoù, a-dra-sur. Ur yalc'had a vez roet gant ar gouarnamant.

E penn kentañ ar gouel e vez ur pred, gant prezegennoù, kan ha sonerezh. Amañ eo e vez hetet "donedigezh vat" d'an dileuridi a-berzh ar Mod hag an Eisteddfod hag int d'o zro a zistag un nebeut bommoù en o yezhoù broadel. Ambrouget e vez an dileuridi-se, ha n'o devez netra da zispign nemet evit o beaj.

Aozet-mat e oa an traoù er bloaz-mañ gant ar poellgor lec'hel. E meur a stal e oa skritelloù a-dreñv ar gwerennoù gant diskleriadurioù en iwerzhoneg. En ur ger a 25.000 den bennek evel Tra Li e vez gouezet gant ar boblañs pa vez ur gouel evel heañ.

Radio ar Gouezelva (na vez klevet nemet war un hed-gwagn berr-tre ur wech ma vezer aet ouzhpenn 80 km diouzh ar gouezelvaoù, pesh a ziskouez ne ra ket ar gouarnamant foutre-kaer na ne vez ket klevet iwerzhoneg an darn vrasañ eus ar boblañs) e voe pellgaset kement tra c'hoarvezet e-pad ar gouel. Dishañval diouzh RFI, Radio na Gaeltachta ne bell-skign nemet e yezh keltiek ar vro.

Alan Heusaff

An t-Oireachtas : ar ger Oireachtas (distaget Irac'htas, tost da vat) zo kar da AREIZH e brezhoneg. Gourel eo. Setu perak e lakaet t dirak, da heul ar ger-mell resis, en dro-envel.

Céili : korolladeg, gant dañsoù iwerzhonat.

Korn-trec'h : trophée (pe-seurt ger all ?)

E Dulenn ne vez ket taolet evezh gant 95% eus an dud. Stank a-walc'h e seblante re Dra Li bezañ en abadennoù 'zo evel ar c'héili-ou. Ha strivañ a raent da gomz iwerzhoneg.

Klemmet e voe gant an azerien peogwir ne voe graet meneg ebet eus ar gouel gant ar Skinwel Iwerzhonat, ha nebeut-tre gant Radio-Eireann, servijoù broadel, sañset, hag a vez prest da reiñ brud da abadennoù jazz pe rock kalz disteroc'h. Gant

Ret e vije menegiñ ivez ar prizioù lennegezh a vez roet gant an Oireachtas, a-rack ar sifhunvezh-ouel. Meur a hini zo anezho. Ur priz a £400 a vez roet evit ur romant, unan a £500 evit ur buhezskrid pe ul labour enklask, £250 evit ur skrid burutellerezh, £150 evit ur pezh-c'hoari. Re all a zo, evit ul levr da dud yaouank, swoazerezh, kelc'hgelaoenerezh, barzhoniezh, danevelloù-berr.



LLUN NESAF — TACHWEDD 1AF, NOSON GYNTAF S4C.

# WALES S4C CYMRU

Sianel Pedwar Cymru

Mark Kerrain

**S**oñj o deus moarvat hon lennerien eus pennadoù Robin Llewelyn hag Iwan Kadored diwar-benn ar chadenn kembraek S4C. Digant hon lenner Lanig Herve, eus an Oriant, non eus resevet ur pennad tennet eus ar gazetenn saoz "The Economist" hon eus bet ar blijadur da dreiañ evidoc'h. Setu enta a e'haller lenn dindan an titl souezhus :

### SELLET E VEZ OUTI !

"Pa soñjan e larent oamp o vont da vezañ ur chadenn geto !" eme lenner programoù S4C. Souezhet eo bet an arvarourien, hag an "Economist" ivez, o welout he deus dastumet S4C tost da 50% eus ar sellerien evit he programoù kembraek. Hag he programoù saoznek zoken, tennet eus Pevare

Chadenn Breizh Veur a zastum muioc'h a sellerien (ouzhpenn 10%) eget e peurrest ar Rouantelezh, ma chom sac'het an niver tro-dro da 4%.

Gant startijenn e voe kroget an nozvezh kentañ, pa dapas ar fiftvresadenn Superted 30% eus ar sellerien, saoznegerien kenkoulz ha kembraegerien. Ar rummad Superted zo bet troet ha gwerzhet da 30 bro a-rack a n deiz-se, ha gwelloc'h c'hoazh : prenet eo bet gant BBC1 ha diskouezet e vo er Rouantelezh a-benn an diskar-amzer.

Berzh dic'hortoz, S4C a lako moarvat HTV, ar gevredigezh skinwel kenwerzhel a ra war-dro kavout bruderezh evit S4C e Kembre, hag ar Pevare Chadenn e korn-bro Bristol, da greskiñ he

frizioù a-benn da vloaz. Ken aes eo displegañ ar berzh-se, evel ma oa ken dic'hortoz. Ar Pevare Chadenn a skign abadennoù skuizh evit minorelezhioù. Ha S4C a ra war-dro ur vinolerezh hepken : ar 500.000 kembraeger zo e-touez an 3 milion a dud zo e Kembre, gant 20 milion a lurioù sterling da zispign. Gant ar Pevare Chadenn ez eus 100 milion evit tizhout yaouankizoù, pesketarien, Azianed, merc'hed ha minorelezhioù a-seurt se, e-touez an 20 milion bennek a sellerien a zo er vro-mañ.

S4C a zo dieub diouzh reolennoù an Independent Broadcasting Authority ha raktresoù ar gompagnunzh kenwerzhel broadel.

Pa vank bruderezh da stouvañ un toull, e tremener kenkent d'un abaden all. Gallout a ra skignañ abadennoù gwellañ ar Pevare Chadenn pa gar, da larout eo da eurvezhoù ma n'eo ket koulz ar chadennoù all, ha da lakaat re disterañ ar Pevare Chadenn da eurvezhoù ma ne vefent ket sellet forzh penaos. Ha dreist-holl, gant he c'heleler-noz kembraek, e c'hall S4C dilezel keleier ar Pevare Chadenn etre 7 hag 8 eur bep noz d'an eurioù pouezus.

Kembreiz o vezañ evel emaint, n'eo ket bet start da S4C kavout en he bro ur bagad kinigerien plijus ha distagellet. Hervez a lare ur penn eus S4C : "Hengoun ar Eisteddfod war hent an elektroneg".



## BLOAVEZH KENTAN AN AOTREEGEZH

Ur bloavezh skol-veur 1981-82 e oa bet 324 enskrivet war aotreegezh vrezhonek Skol-Veur Breizh Uhel e Roazhon. 63 anezhe (50 paotr, 13 plac'h) zo bet diskleriet "barrek da gelenn brezhoneg". Met pet anezhe a c'hall ober, pet a gavo labour gant ar brezhoneg ? Diwar an 12 post bet krouet warlene n'eus bet nemet 2 pe 3 hanter-hini zo bet roet dezhe (e Gwengamp, Roazhon ha Lannuon nevezik zo bpred).

### postou kelenn

Se zo kaoz ez eus bet 14 anezhe o lakaat o anv war ar C'hapes brezhonek (n'eus ket anezhañ, eveljust). Hag eveljust eo bet respontet dezhe ne oa ket posubl. Pa vo posubl dezhe kelenn o yezh e c'hall marteze ar skolidi deskiñ brezhoneg. Da c'hortoz kement-se ne hañval ket an traoù mont buan war wellaat gant raktres tri bloaz ar Rektor, pa vez gwelet penaos emañ gant e vloavezh kentañ. Klaoustre ne blij ket dezhañ berzh dic'hortoz

(evitañ !) an aotreegezh vrezhonek eta, pa 'z eo anat d'an holl e kresko buanoc'h niver ar studierien "aotreet" eget niver ar postoù a c'halllo kinnig dezho. Hag ouzhpenn-se ne vo ket, (ha ne fell ket d'ar Rektor) kinnig ar postoù-se da studierien : kinniget e vezont da gentañ da dud e diabarzh an Deskadurezh-Stad (na posubl ne vent ket gwall varrek da gelenn). Ha n'eo ket a galon vat eo bet roet da studierien (a-ziavaez an Deskadurezh eta), nevez tapet an aotreegezh vrezhonek gante, hanter-bostoù brezhonek Gwengamp ha Lannuon. Gwelloc'h e vez kavet marteze ne vije den ebet da gemer anezhe. Ha setu a zo bet c'hoarvezet e Baod (CES) hag e Roazhon (skol-vamm). Espern arc'hant diwar goust ar brezhoneg.

### kevrenn geltiek

### Roazon

223 studier zo aet da lakaat o anv evit an

aotreegezh vrezhonek er bloaz-mañ. 52 evit ar vestroniezh, ha 16 evit an DEA (bloavezh kentañ an Doktoarelezh 3de kelc'h). Diwar an 291 studier-se n'eus bet nemet 85 o vont da votiñ evit Kuzul Studierien ar Gevrenn Geltiek er vouezhiadeg zo bet e miz Kerzu er Skol-Veur. Trawalc'h, forzh penaos, da gaout evel warlene (gant 84 mouezh) div gador diwar ar beder a oa da gemer en UER ar Yezhoù Estren (!). Ur gador all zo aet gant an UNEF-ID, tapet ganti 72 mouezh (2 gador warlene gant 78 mouezh), hag unan all gant an AGEUR-UNEF, tapet ganti 68 mouezh (pa n'en em ginnige ket warlene).

Gallout a reer gwelout, ma ne vot ket niverusoc'h studierien ar Gevrenn evit o c'huzul ar bloaz a zeu, e c'hall bezañ echu gant e lañs. Ha mantrus e vefe, pa soñjer ez eus c'hoazh traoù da c'honit (evel an DEUG hag ar C'HAPES brezhonek, an divyezhegezh er Skol-Veur...) gant ar studierien vrezhonek, pa ne vije nemet gwellaat o benveg sudi.

Se zo kaoz eo dipitet un tamm tud ar c'huzul-studierien o welout ar bras eus danvez loreidi an aotreegezh o vezañ ken digas ouzh buhez ha dazont o c'hevrenn vrezhonek, ha ken disoñj eus ar stourm renet gant ar c'huzul ar-raok gonit an aotreegezh vrezhonek. Koulskoude emañ a-du an holl gant ar c'huzul pa lar eo ret kaout ur C'hapes. Rak ouzh ar stourm-mañ eo stag dazont ar c'helenn brezhonek. Poent eta mont war-raok !

Mikael Baudu

-3 c'hador zo aet gant Kuzul ar Studierien Vrezhonek ivez e Kuzul Skol Veur Breizh Uhel.-



## KENTAN DEREZ DIWAN

Sac'het e seblant bezañ ar gaoz etre Diwan hag an Deskadurezh-Stad. Ne vez prometet d'ar vrezhonegerien nemet un dra, warbouez nebeud (pag ouzer kompren mat) : ne vo ket eus Diwan a-benn 3 bloaz ac'hann. Sed kement ha kas an dorzh d'ar gêr da bennoù bras Paris etalc'h ar skolioù brezhonek nemeto da greskiñ, da vont gant o zammig hent.

Klasoù nevez zo bet digoret ar bloaz-mañ un tammig e pep lec'h, evit ar c'hentañ derez. Unan deuzouto a oa bet roet lañs dezhañ e miz Here 1982 e Roazon, hag un tamm gouel a oa bet savet neuze, da geñver an digoriñ ofisiel.

D'ar Gwener 10 a viz Kerzu e oa deut kalzig a dud, eta, goude ar c'hentelioù. Kouviat e oa bet tud a-bep seurt. Ar Rektor Ar Moal, Yann-Ber Duval (kuzulier-kêr Roazon), Prezidant Diwan Breizh Andre Lavanant hag ur bern reoù all, intreset gant amzer da-zont ar brezhoneg, a oa deut tre en ti-skol da dañva ar gwin gwenn, ar gwas-tilli, ha da doullañ kaoz gant ar mestr-skol, gant ar vugale, pe da zistagañ bep a dammig sarmon dirak an holl.

Bihan eo c'hoazh ar skol nevez. Tri grouadur a zeu ingal da heuliañ kentelioù kentañ ar skol kentañ derez ("C.P." e

galleg). Laket e oa bet ur brezhoneger ampart war e yezh, Patrig Favreau, da vestr-skol, hag evit bremañ eo bet desket kement hag a oa merket er program ofisiel, nemet e brezhoneg penna-da-benn e ve.

Evit ar c'helenn, just-a-walc'h, n'eo ket bet un hanter re vrav al labour troiñ ar c'hentelioù matematik en hor yezh, ha fardañ paperennoù da labourat dre skrid rak deskiñ lenn ha skrivañ a ra ar vugale ivez. A-benn bloaz a zeu e vo labourus ar skol-mañ c'hoazh, pa ne ve ken an daou live-skol da gas en-dro asamblez, pa teuio bugale nevez er C.P., ha pa yelo re ar bloaz-mañ d'ar C.E.I.


'Dal ket ar boan laret ur wech c'hoazh neuze penaos he deus Diwan ezhom sikour. Hag ar mod gwellañ da sikour anezhi, evit an argant, a vez lakat ho ti-bank da gas gwenneion bep miz. Moaien 'zo goul ar baperenn gant n'eus forzh peseurt skol. Evit ar re o deus amzer vak ha startijenn en enno, e c'hallont kemer perzh e-barzh Skoazell Diwan a-benn aozañ festoù-noz, gouelioù hag all. Evit ma vevo ar brezhoneg e chom ur pezh mell labour d'ober.

Joel Donnart.

HAG UN DEIZ E VO KEN NIVERUS  
BUGALE DIWAN HAG AN ZASTOÙ  
A WELAN WAR AN DAOL MA NE  
VEZ KET DEBOST  
PEP TRA  
AKAOK NAM  
BIE EHU...



Lennit al liamm



"A-benn bloaz e c'hallfe muioc'h eget 14 studier degemer ar respont-mañ."



## STROLLAD C'HOARIVA PLOUGIN



*Perak ober c'hoariva e brezhoneg ?*

Ar c'hoariva a zo evidomp un doare da stourm evit ar brezhoneg, ha gantañ. 7 vloaz zo abaoe m'eo kroget ar strollad. Er penn kentañ, gwir eo, e oa souezhet an dud o welet ur vandennad re yaouank o komz brezhoneg war al leurenn, ha zoken etreso, arak ha goude an abadennoù.

*Penaos ez oc'h bet digemet ?*

Dre m'hon eus klasket sevel ur vuhez sevenadurel war ar maez eo bet plijet an dud ! Evel just a-nebeudou nemetken ! Anavezet e oamp, brezhoneg ar vro a oa ganeomp, ha pezh zo pouezus ivez, omp tud diwar ar maez. Ouzhpenn, hon eus klasket atav lakaat an arvesterien e-barzh an taol, en ur bediñ tud war an oad da ganañ pe da gontañ ur farsadenn bennek !

*Daoust hag ho peus levezon war an dud en ho korn-bro ? Daoust hag e teuas'ha a-benn da dizhout ar pel, stourm evit ar brezhoneg ha gantañ ?*

D'hon soñj e oar tamm pe damm an dud pezh a reomp. Muioc'h a dud a vez o sellet ouzh ar pezhioù dre vras. Gwelet a reont mat ez omp aet-ni war-raok. Kinnig a reomp abadennoù kempennoc'h eget er penn-kentañ. Kendalc'her a reomp, ar strollad a chom "bev mat", ur bern gouelioù a vez aozet.

Un tregont bennak a dud a deu d'ar c'hentelioù brezhoneg diouzh an noz, e Plougin. Kalz ac'hanomp a zo e-barzh ar Strolladoù Skoazell da Ziwan.

Ur bern tud koulskoude ne seونت gwech ebet da welet pezh a reomp. Chom a reont da sellet ouzh an tele marteze, pe mont a reont d'ar foot, d'an ostaleri pe d'an "toullioù-noz". Ne vir ket ouzhip ober kemend-all !...

Kalz a dud (ar gevredigezh dre vras) a gred ez eo re ziaes kompren ar brezhoneg, ha forzh penaos e kav dezho ne servij da netra en dervezh-hiriv ! Lod a gav dezho marteze emaoamp kilstourmerien, pa 'z eo inti na fell ket dezho digeriñ o daoulagad.

"Dañjerus ? Tamm ebet !" diwar-benn an nukleel, hag ar pezh "Loen-blein pe marc'h-limon" diwar-benn al labourdouar e Breizh.

Anat oa deomp diskouez dre ar c'hoariva emaoamp war ar memes tamm douar hag hon eus darempredoù kenetreomp. An doare-bevañ "Sach an hini



Stad ar brezhoneg, hag ar sevenadur dre vras, a zo izel e-barzh spered an dud. Pezh a gont eo ar vuhez-bem-deiz, a zo pouezus ivez evel just... ya, met pa ne vez nemet an dra-se... ?

*Piv pe betra zo kaoz da gement-se ?*

Ar galloud politikel hag ekonomikel eo e gwirionez en deus klasket mougañ ar yezhoù bihan ha pinvidigezhioù sevenadurel kement korn-bro. Deuet eo a-benn da lakaat an dud e-barzh ar memes framm gant ar memes doare-bevañ, boueta, koñso-miñ ha... soñjal. Pebezh paourentez !

*Perak neuze sevel ha c'hoari pezhioù diwar-benn ar broioù paous pe an Trede Bed ?*

Kendalc'het hon eus gant an hent boulc'het gant

ma c'hell" n'eo ket posubl evidomp. Pouezus eo reiñ da gompren eo ar memes sistem a zo o kas ar brezhoneg d'an traoñ hag a zo kaoz da gudennoù an Trede Bed. Ar stourm evit ar Brezhoneg a zo liammet gant ar stourm evit difenn an dud paour-se.

*Penaos ho peus graet evit sevel ur pezh-c'hoari diwar-benn an Trede Bed : "Keit ha ma vo tud" ?*

En em soñjet hon eus kalz ! E-pad bloaz hanter, bep Gwener da noz, hag ur Sadorn ar miz. Gwir eo ne zeomp ket buan, met pouezus eo bet al labour-mañ.

Sell, gant 1% diouzh an dispignou graet gant an arme er Bed, e vije a-walc'h da reiñ peadra d'an Trede Bed d'en em saveteiñ drezañ e-unan. N'eo ket an aluzen eo o deus ezhoamp (ar brezhoneg kennebeut !)

Chas ha kizhier Bro-

C'hall a zreb en 1 bloavezh kement a voued hag an holl dud e Portugal.

Pe den e Bro-C'hall a zreb 220 lur a gig beb bloavezh, 20 lur a vije a-walc'h evit ar yec'hed.

Bro-C'hall : 2 vilion a dud dilabour, 4 milion a dud estrañjour.

E Brazil, plas an hariko du en deus digresket eus 36% (pa 'z eo boued diazeze an dud eno). Ar soja en deus kemeret e lec'h. Hemañ vo gwerzhet d'ar staliou etrevroadel evit boueta hon chatal pa 'z eus peizanted ahont ha ne zrebont ket a-walc'h. Evit profit bras ar staliou arc'hant evel just.

*Setu aze kalz a vennoziou, met petra eo steuern ar pezh-c'hoari ?*

Bez' eo istor an dud a rank divroañ evit gounit o buhez : planedenn an divroidi, Breizhiz en o zouez !... gant ar c'hudennoù a zeu : al lojeiz, an digemer, ar ouenn disheñvel... Erfin ec'h echuomp gant goulennoù : Peseurt kiriegezh hon eus

(30mn) a zo bet savet ouzhpenn evit gellout kinnig un abaden founnus a-walc'h el lec'hioù ma zeomp da c'hoari.

An hini kentañ eo "Gwenn ha Du" gant Naig Rozmor ha Per Mari Mevel. Istor ar peizant a oa aet da glask ur vaouez e-barzh an Antilhez. Ar pezh-mañ a zo tener ha farsus.

An eil pezh eo "Buzhud ar Garantez" gant ar memes skrivagnerien adarre. Istor ur peizant en doa diaezamant da lavaret e garantez hag e c'hoant-dimeziñ d'ur plac'h. Ar pezh-mañ neuze a zo farsus-kenañ.

"Keit ha ma vo tud" zo bet c'hoariet 9 gwech abaoe miz Gouere. "Gwenn ha Du" : 5 gwech, ha "Buzhud ar garantez" 3 gwech.

C'hoari 'reomp dreist-holl e Bro-Leon met prest omp da vont da c'hoari d'ar Broioù all ma vezomp goulenet.

*Penaos e welit amzer da-zont ar strollad ? hag hini ar brezhoneg ?*

Er strollad ez eus muioc'h-mui a dud (ouzhpenn 15). Dibabet hon eus sevel ur pezh nevez evit miz Mae 83. C'hoant hon eus sevel ur pezh poblek diwar-benn an amzer vak, ar gouelioù war ar maez en hon Bro. Klasket vo lakaat an arvesterien ar muiañ posubl e-barzh an taol evit aesaat ar gomprenoz ha reiñ ar muiañ a blijadur d'an holl. Fiziañs zo da vont war-raok c'hoazh. Met, gwir eo, ar c'hoariva a gemer kalz amzer ha ne vez ket a-walc'h a dud o tont da welet.

Ret 'vije kaout ur bern strolladoù c'hoariva e kement broig ; pe neuze marteze 'vije poent sevel filmoù e brezhoneg. Muioc'h a levezon hon dije evit kas ar brezhoneg war-raok. Piv oar ?

ni ? Petra ober ?

"Keit ha ma vo tud" a bad un eur. Pleustret hon eus war ar c'hoari ha klasket lakaat anezhañ trec'h d'ar c'homzoù ar muiañ posubl. Sevel ur pezh n'eo ket anat atav. Setu e vo rebechet a-wechoù ablamour ma n'eo ket sklaer al liamm a zo etre an arvestoù, an tamm diwezhañ a zo souezhus. Diaes eo chom diseblant, token ar c'hallegerien...

Daoust d'an holl rebechoù pe sioù eo ar pezh kempennañ, pe gaerañ, savet gant ar strollad. An dra-mañ a zeu peogwir ez omp bet sikouret gant ul leurrenner a vicher a deve ur wech ar miz, Michel Olivier, eus Ministrerezh an Amzer Vak e Roazhon.

*Ouzhpenn-se ho peus savet 2 bezh all ? Petra int ? Pet gwech int bet c'hoariet ?*

2 bezh-c'hoari bihan



**E**vel meur a vrezhoneger all emañ ma arc'hant er CMB abalamour d'ar chekennoù brezhonek embannet gante. Abaoe ur pennadig ez eus bet laketa gant ar CMB "Minibankoù" e kêrioù ar vro, ha gallout a reer zoken goullenn enne karnedoù-chekennoù gant ur gartenn blastik. Ya, met n'eus nemet ur seurt chekennoù n'haller ket goullenn, hag ar re vrezhonek eo. Rak pevar seurt a zo, kodet 01, 02, 03, ha 04 evit ar re vrezhonek. Ma rit ar c'hod 04 er Minibank, ne rit nemet goullenn digant ur den dont d'ho kwe-lout. Meneg ebet e pape-renn-implij ar Minibank eus chekennoù brezhonek. Da c'hortoz diskleriañ d'an den a zeuio d'ar gêr petra a soñjan eus an implij "kuzh" a vez graet eus ar brezhoneg gant ar CMB, em eus skrivet ma soñjoù da Renner ar CMB e Kerc'hor. Ha ne baeuzan ket da c'hoari gant an niverenn 04 e kement Minibank zo e kêr. Aliañ a ran ar re all d'ober evel don.

**N**'eo ket plijet tud Unvaniezh ar Gelennerien Vrezhonek o welout eo bet digresket niver ar stajoù-stummañ kelennerien vrezhonek ar bloaz-mañ, ha n'eo ket bet posubl da gelennerien vrezhonek bro-Naoned heuliañ anezhe evel warlene. Setu aze c'hoazh pennoù Fall a ra van da grediñ ne ya ket an traoù war-raok dindan gouarnamant an tu kleiz.

**E**-barzh "Bremañ" niv 14, e diaz ar bajenn diwezhañ, ho poa lennet e oa bet skignet "Div eurid brezhoneg bemdeiz" e-pad ar gouelioù etrekeltiek, get Radio-Meduse (An Oriant 91 Mhz).

Brezhoneg 'vez klevet dalc'hmat ar Radio-Meduse. Pas bemdeiz, siwazh - n'eo ket tud a vicher a labour ar-dro ur radio dijabl el Radio-Meduse. D'ar Gwener, etre eizh eur ha nav eur da noz, e vez moian da dud korn-bro an Oriant selaou ouzh un abadenn e Brezhoneg penn-da-benn : "Fall amzer" hec'h anv !

Petra 'vez kinniget e-barzh "Fall amzer" ? Klasket e vez lakaat tud ar vro da gaozeal ar muiañ posubl. Abadennoù zo bet, da skouer, get ur gwenanour, get ur paotr kozh a sav sonennoù, get unan arall a ra ar-dro ur gevredigezh evit adsevel ar chape-lioù, get skolaer Diwan an Oriant, hag all... Graet zo bet ivez abadennoù get kontadennoù, danevelloù, pe doereioù ag ar vro.

M'o deus c'hoant brezhonegerion korn-bro an Oriant sikour get ar re a ra ar-dro abadennoù brezhoneg Radio-Meduse, pe sevel o abadenn, n'o deus ket 'met skriv da Philippe Cario, Le Clech, 56520 Gwidel.

**D**ou zevezh goude dieubidigezh B. Korbelt, hag un eizhtez bennak a-raok hini H. Kerrain, e oa erruet e Toull-bac'h Roazon Youenn Chaillou ha Yann Becheneg, disenterien eus ar MIB ivez. Ar re-mañ avat na vint ket barnet gant an TPFA, a zo marv bremañ, rak ul lezvarn ordinal a raio war o zro. Ouzhpenn-se o devo da vezañ barnet e Gwengamp evit bezañ dornet sañset kanad PS ar c'horn, Maurice Briand, pa oant aet d'en em stagañ outañ e miz Kerzu. Ouzhpenn-se c'hoazh, e vo barnet Youenn Chaillou e St Nazer evit bezañ livet mogerioù eno, da goulz donedigezh priñs-gwaz Rouanez Bro-Saoz, gant gerioù jentil evitañ mod Iwerzhon.


Da c'hortoz o deus B. Korbelt hag H. Kerrain kaset klemm da Lezvarn Europa a-enep d'ar Stad C'hall, o larout oant bet barnet gant ul Lezvarn kontrol da Wiroù Mab-Den (an TPFA), ha ne oant ket bet aotreet da gomz brezhoneg d'en em zifenn dirazi. Gortoz a reer bremañ da c'houzout hag-eñ e vo degemeret o c'hlemm gant Lezvarn Europa e Strasbourg.



Luc'hskoudeñ - Joel Donnat

**U**r skol divyezhek e Sant Rivoal ? Setu a c'houlenn, a hervez, kerent ar vugale eno. Setu a blijo moarvat d'an Itron Favreau, Ensellerzh, a skrive diwar-benn skol Diwan Pont 'N Abad (Bremañ niv.9 - Kerzu 1981), e yae a-enep da lezenn ar Republik pa veze kelennet enni en ur yezh ne oa ket ar galleg. Ha kemmet eo al lezenn Itron ?

**U**r plac'h yaouank a ra skol vrezhonek e CES Kerpaour e Gwengamp he deus ar chañs da gaout ivez un hanter-bost evenshaerez. Rak a-hend-all n'he defe bet gweneg e-bet abaoe m'he deus kroget da labourat : servijoù ar Rektordi ne fell ket dezho paeañ anezhi evit he hanter-bost brezhonek. Ma, arabat dezhi klemm ! Bez e c'halfe bezañ dilabour ha dibae, evel meur a hini all dija, gant hec'h aotreegezh vrezhonek.



**E**vel m'en doa graet Herve ar Beg bloaz zo, (Bremañ niv. 8) em eus divizet, me ivez, chom hep paeañ ma zimbr-karr (bignetenn-wetur) hag e briz 'm eus roet da Ziwan. An arc'hant-se ne raio ket diouer d'ar Stad, sur eo !... Perak ?

Ne baein ket keit ma ne vo ket roet e blas gwirion d'ar brezhoneg : krouiñ postoù, digemer Diwan er Servij Publik, digemer an divyezhegezh (panelloù, melestradurezh).

Bremañ e c'hortozan bezañ tapet gant ar fli-keid. Risklusoc'h eo evit an niveridigezh : un afer tailhoù eo. Doan eus al lezvarn pe get, n'emañ ket aze ar gudenn. Met ma fell dimp bezañ efedus e rankomp krenvaat hon stourm (en ur ziwall ouzh ur seurt c'hwitadenn evel hini RTB).

Herve ar Bihan  
SAE Gwened



**S**trolladoù kanerien Korsika I Muvrini, Canta U Populu Corsu, A Filetta, Fola Fuletta, a sav a-enep harzidigezh Ange Delfini, stourmer sevenadurel, pa n'eus mann da damall dezhañ. Goullenn a reont eta e ve laosket da vont.

**N**evézinti vras ar bloaz-mañ a vo bet anv- digezh Per Bernard, Kuzulier-Kêr en Oriant, ezel eus Kuzul ar Rannvro hag ar PS, evel Enseller evit ar Brezhoneg. Ar re ne gomprenont ket pebezh araokadenn eo bet evit ar brezhoneg ne gomprenont mann er politikerezh "Pépère" Bernard, a zo bet ivez, a-wechoùigoù, paotr ar PS e bodadegoù an Talbenn Sevenadurel, ne vez mui gwelet enno abaoe pell zo. Tud zo a gred c'hoazh emañ o labourat da renkañ an diaezamantoù er c'helenn brezhonek.

**M**ut e chom holl gos- tezennoù politikel ti- kêr Roazon (PS, PC, UDB, MRG) pa c'houlenn SAE digante abaoe ouzhpenn bloaz petra a soñjont eus emzalc'h ar Justiz, an Arme, an SNCF ouzh ar brezhoneg, perak eo bet tennet kuit panelloù "Roazon" ha "Leurgêr Breujoù Breizh". Abeg ebet eta e respontfent bu- anoc'h pa 'z eo bet gou- lennet digante peseurt skoazell a roont d'ar c'helenn brezhonek en eil derez hag er Skol-Veur, evel m'o deus kredet em- bann en o c'hazetenn "Le Rennais".



poent bras eo

profan deizataer 1983

d'ho mignoned

20 lur e-lec'h 30 dre lizher !!

